

AR PILLAOUER

4

Ma zad en deuz ma dimezet
Gand eur flaerius pillaouer (hadlavarout)
En Lokeffred ez eo ganet,
En komantan Toul-al-Laer.

Diskan

Foei, foei, foei, ma zammik aotron,
Gant e stoup hag e billou.

2

Rakta! an Anjulus sonet,
Gant kleier braz ar Fouille, (had.)
Ma lapousik, prim dihunet.
A sav 'meas deus e wele.

3

Drailla 'ra eun hanter pater,
Tana 'ra e gorn-butun (had.)
Kemer a ra e grog pouezer,
Evit mond war hent Sizun.

4

Pa'n deuz kavet kamaraded,
Ebars eun davarn bennag, (had.)
Meur a vanne en deuz evel,
Vit lakaat e gorf distag.

5

Dispign a ra en eun dervez
Gonidegez eur sizun. (had.)
Me choum alies intanvez
Ebars ma gwele, ma-un.

6

Bep gwech a ia d'ar pardoniu,
E vez ato mezo dall : (had.)
Darbet oa d'han koll e vrugou,
En Lokeffred, an deiz-all

7

Pa vez pignet war e azen,
E touez e dammou pillowou, (had.)
Evel eun Impaler romen,
Ez eo berr en e gomzou.

8

Mar deufe ar c'hiz er vro-ma
Da derri an dimeziou, (had.)
Me a ielle, en eur gana,
Pell deus paotred ar pillowou.

9

Pa zeuio Karrik-an-Ankou
D'ober eun dro er vro-ma, (had.)
Me a iello war e roudou
'Vit ma deuio d'hen zamma.

10

Komzet 'vo d'an aotro person
Deus ar flaerius pillaouer, (had.)
'Vit ma kano al liberon
Hag ouspenn al liberer.